

Patron Parrez Pouldahu

—ooc§ooo—

DISKAN

Sant Jakez, Patron Pouldahu,
Grit ma c'hellimp evel doc'h-hu
Karout Jezuz war an douar,
Ha mont gantan, eun deiz, d'ar c'hloar!

I

Gant ho preur Yann oac'h martolod,
War vag ho tad ho poa ho lod:
Anaout'rit poan an dud a vor,
Beilhit war bôtred an Arvor.

II

Skouer d'ar c'hristen fur ha sentus,
Kerkent ma klevit mouez Jezuz,
C'houi 'zav da vont war e roudou
E-kreiz divoul ho rouejou.

III

Ho mamm 'vidoc'h a c'houlennas;
Er Baradoz, ar c'henta plas,
Pa 'moc'h breman 'bro an Ele
Mirit eur plas d'ho pugale.

IV

Dorn prim ha kalon entanet:
"Mab ar gurun" oec'h lesanvet.
Astennit ho prec'h en emgann,
Pa rankomp stourm enep Satan.

V

C'houi hag a oa, 'vel Yann ha Per,
Muia karet gant Hor Zalver,
Pa vimp en doan, o Sant Patron,
Diskouezit d'eomp dor e Galon.

Imprimatur. P. Messenger, v.g.
12 juillet 1944

VI

War an Tabor, weljoc'h e c'hloar,
E Jetsemani, e c'hllac'har:
E levenez pe en anken,
Harp' ouz floue 'tle chom an den.

VII

Peurredet'peus broiou e -leiz,
Betek ar Spagn, d'hada ar Feiz:
Mirit Feiz koz ar Vretoned
E kalozou ho Filhored !

VIII

Prometet ho poa da Jezuz
Gouzanv 'vitan poaniou skrijus:
Ar c'henta eus an Ebestel,
Evit ho Mestr c'houi oar mervel.

IX

Ar beden a rejoc'h neuze
Pa lugernas dir ar c'hleze,
Grit m'he c'hlevimp hirio ganeoc'h:
"Otrou Doue, roit d'eo ar Peoc'h!"

X

Hent Sant Jakez, pa gouez an noz,
A zoug hor sonj d'ar baradoz:
Sonn pe strilhet, diriskl al lestr,
P'eman war vël Jezuz ar Mestr !

PEDEN

D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered-Glan,
Henor, meuleudi, hep ehan;
D'eomp, dre veritou Sant Jakez,
Graz d'en em gaout en o Falez.

Pouldahu, e Kerne,
Gouere 1944

